



Douar - Aer - Mor

Fichenn savet gant Silvenn Koant

Evit piv?

Adalek ar CP en ur sal vras pe er maez

Talvoudegezh ar c'hoari

- Anavezout loened ha pelec'h emaint o vevañ.
- Bezañ aketus

Mont en-dro ar c'hoari

Ur c'helc'hiad a c'hoarierien azezet.

E-kreiz emañ ar rener. Lavarout a ra d'ur c'hoarier « douar », « aer » pe « mor ». Neuze e rank ar c'hoarier respont buan gant anv ul loen o vevañ en douar, en aer, pe er mor. E-keit ma klask ar c'hoarier e c'hell ar c'hoarierien all ober trouziou loened ha n'o deus netra da welet gant ar respont.

- ma vez kavet gant ar c'hoarier e kemer plas ar rener evit ober an hevelep goulenn gant un den all. Ar rener a azez er c'helc'h.

- ma ne vez ket kavet gant ar c'hoarier e vo ret dezhañ marmouzañ al loen a oa da gavout dirak an holl.

N'eus ket tu da respont anv ul loen implijet dija.

Un doare all da c'hoari

_ Kemeret e vez ur gartenn gant ur c'hoarier, anv ul loen warni ar c'hoarierien all da zivinout peseurt loen eo dre c'houlennou. da skouer :

- nijal a ra ? - ya, nijal a ra pe ne ra ket
- stlejañ a ra .? - neuial a ra ? - pluek eo ? - blevek eo ?- skantek eo ?
- daou bav en deus ? - pevar fav en deus ? - angelloù en deus ? - eskell en deus ?
- kerniel a zo ouzh e benn ? -ul lost en deus ?- moueek eo ?